

### Gwerz Judas

Me o suppli kompagnunez didostaït aman da klevet  
Buhez an den maleürusa a zo bed biskoas var ar bed.

he dad ag an deveus lazet ag ive mab eur Roue  
e vam brop en deus eureujet a trahisset mab Doue,

De vam pa voa oc'h e zougen ar profet a lavaras  
e divije eur c'hraoadur a rache dizi anken vras

e dad ag e vam o klevet er c'helou ken dinatur  
Petra klîe erruout neuze er bed gant ho c'hraoadur

Ma voant ken trist a ken nec'het mo deus chonjet etreze  
en instant ma vije ganet ober dean koll e vuhe

Er jude pa zeo bed ganet e gerent o deveus chonjet  
ober prompt eur vagig vrouet ag eni eo bed laket

Losket e tre daouern Doue da vond gant ar mor perillus  
O chonjal e neum dizober d'oc'h en den ken maleürus

Ar mor, an avel, an tourmant, a gundu ar vag vroued  
hag en rentes e savete e bordig eun enezenn

en enezen ze e c'home ar Roue doc'h a ezip  
a n'en devoa a vugale ken emerd eur mab uniq

Pa voa eun dervez e pourmen na gant an tud e bales  
e vellas eur vagig vrouet chomet en touez an trez

ar Roue en deus komandet mond da vellet petra voa  
en instant o deveus kavet eur c'hraoadur ar c'haera

Ma voa roët kommandamant memeus a beurs ar Roue  
De gass promptamant d'ar pales da savetaï e vuhe

Ar Roue a deus e maget ag en devoa ar santimant  
De zeski a de instrui dober a nezan eun den vaillant

mez o veza stag e galon oc'h an avaristet  
ne voui e neb fesson penoz kuitat ar pec'het

Arc'hant, rubanou, bizeïer, a karkaniou, a perlez,  
Kement a alle da attrap a laere d'ar rouanez

Mab ar Roue a voa kossoc'h eun tamik evid iudas  
a pa vellas e laëronsi a lavaras dezan trist bras :

– Me laro d'am zad emezan, penaos e maoc'h o laërez  
hag a lakaïo o histrui mar na gerit chench a vuhez

Judas a kemeras neuze en he galon kassoni  
a maliç doc'h ar prinç iaouank ne alle ked e anduri

Pa voa paseet an dra-ze dijonget an oll a kement se  
e lavar an treïtour dezan deus da bourmen gane-me

Pa voant eun tamik inkartet a roas dezan eun tol bas  
a dan douar mord el pillas ag en he hoad er *fill beuzas* .

Kuitat a eure ar ger ze evid mond da chervija  
memeus er ger ma voa ganed en hostaliri vrasa

e zam ma voa eun den vaillant tud he di en estime  
hag e fissie enan arc'hand pere aliez a laëre

Roëd a veze dezan arc'hant da brena marc'hadourez  
hag en a vire an arc'hand ag a tasse da laërez

e dad a erruas gantan a kommanç d'he skandallat  
iudas a kemeras eur men ag er beuzas en he c'hoad

Al lezen demeus ar vro ze a kondaonne ar muntrer  
da eureuji d'an intanvez evid punission skler

Pa voant hi demezet ar hi beved assamblez  
O konta o avanturiou en eur doma eun nozvez

hag hi komans da grial, otrou Doue, Salver ar bed  
Setu akomplisset breman ar c'homzou doc'h ar brofet

eur mab pini a voa ganti ganet en devoa c'houec'h bis var peb droad  
hag ive doc'h an draze hi anavezaz e mab

Kuitat a eure ar ger ze vuit mond da valle dre ar vro,  
Kuitat an douar a izipt koz da kalz a valeuriou

Pa voa eun dervez e pourmen e kavas Salver ar bed  
o valle gant e ebestel leun a garante parfet

Judas evel mar goellas e neum dollas d'an daoullin  
– mar pliche ganeoc'h emezan va reço va mest divin ?

– Chom pebret em c'hompagnunez a te vello map an den  
o vervel e langroas da brena ar peherien.

Moris Follezour, Taole, 17 meurs 1851.